

XIV.

Da veur a bec'her kaledet
Deut eno da bardona;
Gras e Zoue zo bet rentet.
Bennoz ! Itron Varia !

XV

Pedomp eta ar Werc'hez Vari
Gant fizians, pec'herien baour ;
Eur bedennig kaset dezhi
'Vit hon ene a dal aour.

DISTRO

XVI

Kenavo, mamm drugarezus,
Roit deomp ho pennoz ;
Bennoz eur Vamm ker galloudus
A zigor ar Baradoz.

XVII

Kenavo 'ta Guerc'hez Vari,
Alies e teuimp en dro,
Da c'hortoz ma z'aimp d'ho meuli
D'ar Baradoz, hor gwir vro.

IMPRIMATUR :

Corisopitti, die 2 Maii 1879.

J. JÉGOU, Vic. Gén.

Imp., 4, rue du Château, BREST

KANTIK

DA

Plougastel
Fontaine-Blanche

ITRON VARIA AR FEUNTEUN-WENN

DISKAN

Digant Jezuz, Guerc'hez santel,
Ken karet en hor parrez,
Goulennit evit Plougastel
Feiz, Esperans, Karantez.

I


Ni ho kar, Iliz venniget ;
Ken kaër en ho podad gwez,
Plas sakr gant Mari dibabet
Evit chom en hon touez.

II

Kerkent ha m'eo bet kristenet
Hon tud koz e Plougastel,
Da Vamm Jezuz e voue savet
Er Feunteun-Wenn eur chapel.

III

Kant vloajou, gant eur feiz dispar,
Eno ' pedas hon tadou ;
Allas ! an amzer a ziskar
An dud hag o labourou.



IV

An amzer en doa diskaret
 Chapel goz ar Feunteun-Wenn,
 Ne chome d'an Imañ karet
 Nemet disheol eur skoënn.

V

Gant tud devot da Blougastel
 Kaset da Iliz sant Per,
 Antronoz ar Werc'hez fidel
 Distro zo kavet er ger.

VI

Teir gwech diouasket an Elez
 He digasas d'he gwezenn,
 Evit diskouez he bolontez
 Chom ato er Feunteun-Wenn.

VII

Eno eur goabrenn lugernus,
 Hervez komz hon tadou koz,
 Azioc'h ar Chapel Vurzudus,
 En eur dremen a repoz.

VIII

Ar goabrenn eo merk ar grasou
 Zo skuilhet er Feunteun-Wenn
 Gant hor Mamm a zo en Envou,
 Ha Jezuz en he c'hichen.

IX

Rak-se bugale Plougastel,
 Laouen hag a greiz kalon,
 A zired ato da Japel
 Ha Feunteun o Mamm wirion.

X

Int a c'houlenn outhi skoazel
 'Vit ho breudeur war ar mor,
 Pa vez o lestr gant an avel
 Dismantret ha leun a zour.

XI

O tiblas da vont d'ar brezel
 Ar zoudard er Feunteun-Wenn,
 A bromet start dougenn fidel
 Skapular ha metalenn.

XII

Ar c'hlanvour kez war e wele
 A zigas d'ar Feunteun-Wenn
 Tud da c'houlenn ma vo pare :
 Selaouet vez e bedenn.

XIII

Oh ! nag a gristen glac'haret
 Deut siouas ! o skuilh daëlou,
 Gant Mari zo bet konfortet
 Araok fin e bedennou.